

KIS-393 – Gl. **discerner, discriminer.**

(GE – 04 05 91)

E KIS-380 (Gl. *discret*) e raen war-dro un deverad Gl. eus La. *cerno*. En hevelep kerentiad e chomimp o plediñ gant Gl. **discerner, discriminer** (diwar La. *discerno, discr"#men*).

Ster boutin an daou dermen zo "lakaat kemm etre, rannañ da anaout".

1. – Gl. **discerner.**

Ster hollek ar ger zo "dont a-benn da zec'havaelañ udb. na oa ket anat da gentañ". Tri c'hemeradur zo d'ar ger hervez m'en arverer e-keñver merzhout, e-keñver meizañ pe e-keñver ober.

1a. – E-keñver merzhout.

Gl. **discerner** (les couleurs) (hv. **distinguer, identifier, percevoir, reconnaître, discriminer**) "dec'havaelañ spis dre ar skiantennoù, amañ dre ar gweled", Br. **diverzhout** (hv. **deznadiñ**¹, **diforc'hiñ, digemmañ, denaout, hennadiñ**). Sk. : Br. "An daltonegezh zo an dic'halloud da **ziverzhout** livioù 'zo".

Merkomp ne ra ket ar Gl. gant **discernement** er c'hemeradur 1a, met kentoc'h gant **discrimination**.

1b. – E-keñver meizañ.

Gl. **discerner** (le vrai du faux) (hv. **distinguer, différencier, séparer, démêler**) "lakaat kemm etre kealioù, perzhioù, talvoudoù", Br. **deznadiñ** (hv. **digemmañ, diforc'hiñ, didoueziañ**). Sk. : "Mar greer gant keal 'koll an draelezh', e ranker **deznadiñ** ha degemer arlivioù." (GBLF ¶ 1016.)

1c. – E-keñver ober.

Gl. (agir avec) **discernement** (hv. **clairvoyance, jugement, perspicacité**) "ren un ober gant un anaoudegezh fraezh eus ar pezh a reer, eus ar blegenn m'en greer,

¹ Sl. **nadiñ, kevnadiñ**, KIS-064, -065, La-04, pp. 46 hh.

h.a.", Br. **deznadiñ** (hv. **spiswelout, reizhvarn**). Sk. : “Kement ha lavarout e rankont mont ouzh ar gealiadurezh frankizour gant an **deznaderezh** brasañ.” (*Preder* 148, 28.)

2. – Gl. **discriminer**.

Ster hollek ar ger zo : "lakaat kemm etre, savelañ un diforc'h etre, diuz a-douez, disrannañ". Tra ma toug Gl. **discerner** war ar merzhout, ar meizañ, e toug Gl. **discriminer** kentoc'h war ar merzhed, ar meized. Hevelep bukañ d'an ergorennoù a ra reiz war an dibab a ra al lavar gouiziel eus **discriminer** ha dreist-holl eus **discrimination**. Ur sell a daolimp enta war arver skiantel an daou dermen-mañ ; da glozañ, e raimp anv eus an arver politikel anezho.

2a. – Gl. **discriminer** (la hauteur des sons) ; merkomp an diforc'h : **discerner**, arveret er yezh voutin, o kennotañ obererezh ar spered er c'hemeradur ledanañ – **discriminer**, termen kalvezel a vredoniezh, o tenotañ ur gwezhiañ ergorelaet diwarbouez e zisoc'h ; evezhiomp ivez e ra al lavar gouiziel kentoc'h gant ar pennanv pe an adanv eget gant ar verb : “la **discrimination** de la hauteur des sons”, “la sensibilité **discriminative** à la hauteur des sons” (H. PIERON) ; Br. **dezgavaelañ, deggavael** g. (hv. **diforc'hiñ, digemmañ, diverzhout, deznadiñ**), “**dezgavaelañ** uc'hder ar sonioù”, “**deggavaelusted** da uc'hder ar sonioù”. Merkomp an arlivioù etre an heñvelsterioù : **diforc'hiñ, digemmañ** zo dezho ar ster ledanañ, neptuañ ; pouezañ a ra **diverzhout, deznadiñ** war an arvezioù bredoniel pe anadennoniel, hennezh war ar merzhout, hemañ war an nadiñ – n'eo ket, en notenn-mañ, al lec'h da zispakañ kevazlammoù an diforc'hioù ster-se e kelc'h an devezout, nemet e vo mat evelkent lakaat a-wel daou arster o tennañ d'ar vredvedouriezh :

2aα. – Hervez ma ambreder ar merzhout ent strizh. Pa lavarer : “Va daoulagad a wel”, ez eer dre ledentalañ, rak an den eo, e gwir, a vez o verzhout, n'eo nag e lagad, nag e empenn. En degouezh-mañ e c'haller ober gant **diverzhout, deznadiñ** (en ur yezh diresisoc'h, ez arverer **diforc'hiñ, digemmañ**). Geriennoù evel “**diverzhout** gweledel”, “**deznadiñ** gweledel” zo dezho ur c'hennotadur anadennoniel, **deznadiñ** o lakaat an **anaout** e penn kont en tu all d'ar **merzhout**.

2aβ. – Hervez ma ambreder an arc'hwel bevedel ent strizh. Sk. : “le pouvoir **discriminateur** de l'œil”, Br. “**deggavaelusted** al lagad”. E se e ve gant Br. **deggavael-** ur c'hemeradur gouiziel ledan, oc'h ober ar pont etre anadennoniezh, bredoniezh ha bevedouriezh. War an hevelep sterva, arbennik d'ar Vevouriezh (ha d'ar Fizik), e kaver termennoù evel Gl. pouvoir **séparateur**, pouvoir de **résolution**, Br. **diarunusted** (sl. KIS-357, pp.)

2b. – Gl. **discriminer, discrimination** e lavar ar Politikerezh hag an Istor, "rannañ hiniennoù pe stollennoù eus ur boblañs en askont eus un dezverk kravezel, kenelel, yezhel, h.a.", Br. **disparzhañ**. Sk. : Gl. "[...] sans aucune **discrimination** entre les cités et les peuples de toutes les nations", Br. "[...] hep ket a **zispazh** etre keodedoù ha pobloù an holl vroioù" (KIS-266, La-08, p. 107).

Er ster-se, pe ac'hoel en ur ster nes, e kaver Br. **gwallziforc'h** war ABKE., bet goveliet war a hañval gant Alan HEUSSAFF, termen divastus evel an darnvuiañ eus al luniadoù a rakgerier dre **gwall-** o kennotañ ur varnadenn divezel (war an divoud, sl. *Emsav* 126, 7).

Un termen eus an hevelep sterva eo Br. **hanbarzhañ, hanbarzh**, Gl. **ségrégation**. Sk. : "Er Su dreist-holl, dre lezennoù ar Stadoù, dre erez ar Re Wenn, ha gwechoù 'zo, dre an heg, e vez an **hanbarzh** – disparti ar gouennoù – o ren el lec'hioù foran, er skolioù, en ilizoù zoken" (SADED, Don 2, 4).